

ENEZ MOLENEZ

Aman, e bro lein ar mor
Eus a bell a-zlan an dour
'Sav an heol glaz-aour

Aman en em wint an oabl
Ouzh reier noaz an dremwell
Ouzh diarog ar bagou

Aman goude ar wallamser
Huel a sav ac'h an houl
Betek Kastel-an-Daol

Aman zo bet skrivet gant oll
E levr an amzer da goll
Anv 'r garantez foll

An den a roenv e vuhez
A-dal an avel vaez
An den a roenv e vuhez
A-dal maro e-barzh

Aman 've klevet an taw
O strakal e toull an nor
En o stlejan e eor

Aman e bro lein ar mor
Pa deu an amzer diroll
'Ve gwelet o koroll

A-us d'an eon o nijal
Gwenn-kann 'vel lili-mor
O nijal an anaon

Teuziou ar voraerien
'Bet sammet d'eur bed all
Gant Ankou ar mor dall

'Tont en dro war torr an aod
Da besketan ar morvran
Da chalin ar re veo

Re a roenvont o buhez
A-dal an avel vaez
'Re a roenvont o buhez
A-dal maro e-barzh

Hag e ve klevet atav
An tav du e toull an nor
O strakal war an eor

Enez Molenez
Enez poan , enez don
Enez Molenez ,
Kan hon envor da zont .

Ici en haut de la mer
Tout en or bleu de lumière
Se lève le soleil

En étrave d'horizon
Dessus le pont des bateaux
Se cabre l'eau du ciel

Après la tempête saoule
Monte la neige de houle
Jusqu'à Kastell-An-Daol

Ici au livre de bord
En page du temps perdu
On écrit l'amour fol

Ici on rame la vie
Contr' le vent du dehors
Ici on rame la vie
Contr' la mort du dedans

Ici en haut de la mer
Craque le silence noir
Chassant sur ses amarres

Ici en haut de la mer
Dans la danse de l'écume
De l'orage d'hiver

On voit voler en éclair
Les âmes des disparus
Tout's habillées de brume

Les marins de l'autre monde
Qui tournent dans la ronde
Avec l'Ankou de la mer

Qui reviennent au rivage
Pêcher le cormoran
Tourmenter les vivants

Ceux qui rament la vie
Contr' le vent du dehors
Ceux qui rament la vie
Contr' la mort du dedans

Contre le silence noir
Qui craque derrière' la porte
Chassant sur ses amarres

Ile Molène
Ile de peine;, île profonde
Ile Molène
Chante ce que seront nos souvenirs .

(Paroles : Manu LANN UHEL - Musique : Didier SQUIBAN)